

RECIT

Torfejou terubl eruet er bloavez mil eiz cant pevar
uguent, en Escopti Bourdel, gant daou den
malheurus.

Var don ? Santez Eodet

Clevit oll dud devot torfejou horeruz,
Eruet er bloas man gant daou zen malhevrus,
En escopti a Vourdel en dro da-Bolbriac,
Zo eruet malheuriou a zo epouwantabl.

Er bloavez mil eiz cant pevar uguent,
Eo eruet ar malheur vit ret dec'h da entent,
Va halon zo mantret o tonet de gompren,
Va goud em goaziet zo dija eazi yen.

Er blavez man presant uneg a viz gouere,
Eo commancet ar malheuriou goude creiz de.
Gant daou zen malhevrus gant an dioual possedet,
Goude ober o c'hrimou int en em sovetet.

Ar c'henta aneze voa Jean-Marie Laonvien,
Zonjas antreal en un ti pa ne voa den er guer,
Mez pa eo antreet e neuz bet remerget,
Eur plac'h en e goelle a voa clan bras meur bet

En c'houlén diganti an alc'houez euz an arbel
 A lavarát dezàn pelec'h voa an arc'hant poset,
 Ar plac'hig paour mán gant eur voez truezuz,
 A respontas neuze soudén dar malhevrú.

Va phried emezi er guer ne mán get,
 Qeneubeut an alc'houez neuze get ganen lezet,
 Mez hen ouz e fousui dezi e lavarás,
 Ma nen rentas emezàn dín e varvi var ar plac'.

An den malhevrú mán a dennas e gontel,
 A voa gantàn cuzet e bars en e hodel,
 Ar plac'h euz e goele er mez en euz tennet,
 Ag eno var an douar e neuze i e lazet.

Trivac'h tol contel en euz dezi roet,
 Neuze ar malhevrú pa en euz i massaret,
 Ebars en e goele enevéuz racta llaget,
 A gant un incel voan en deveuz i paqet.

An den malhevrú mán neuze a rez e choas,
 An arbel a zifonças deméuz a dolipú hach,
 Ag en eveuz bet cavet ar zom a zeiz cant scoet,
 En aour ag en arc'hant en corn an arbel destumet.

Sortiet eo bet ac'hane ag en euz rancontret,
 E gamarad cruel gant an hent o tonet,
 Ag en deveuz lavaret bonjour did camarad,
 Pelec'h e mán da servez me meus gret un pot mad.

An den-mán a respontas de gamarad cruel,
 Me zo bet abaoue o visita ar prespítal,
 Pe neuze goelet e voa et tout an dud dar gousperou,
 Ma zo bet en em laqet da furchal ar champrou.

Er c'henta cambr e zon et e meuz bet remerget,
Calirou a cibairiou demeurez ar c'hara gret,
Ag evel impression a moa o touch outo,
Evel un tol dre vouez ma o leziz eno.

Ac'hane meuz pignet barz e gambr huela,
Meuz goelet an arc'hant ag an aour o vrilla,
Mez neuze evelgen e meuz bet hasardet,
Qement meuz gallet da douguen meuz digasset.

E gamarad cruel a lavaraz dezàn,
Mar qerez emezàn donet ganen bremàn,
Me ia da zisqueuz diñ un tol a vaillantiz,
Me ia bremàn soudan da visita an ilis.

A pa voa deut ser-vez ec'h antren en ilis,
Da zisqueuz de gamarad ar merq e vaillantiz,
Vel ma c'hantren en ilis e vel un tronc dirazàn,
Mar gallàn e zigueri me mo an arc'hant mèn.

Pen-euz e zigoret e neuz savet ennàn,
Ar zom a zeitec liourd mad eo zur emezàn,
Obèr a-ra tro an ilis gant eur pennat goulou,
Laeret en euz an arc'hant demeurez an oll droncoul.

Neuze euz an ilis e zint bet sortiet,
Ag evel daou ziaoulhant en em dransformet,
Eun ane neuz laqet eun c'hroc'hen eugen var e benn,
A eguile c'hroc'hen eur c'haor evit mont da bourmen.

Neuze int en em dispartiet evit mont da redeg.
Eun a ne dre beb corn neuze a zo et,
Ag ar c'hroc'hen eugen en tour a zo savet,
Vit bransqel ar c'hleier pa vize an dud cousqet.

Ar sañris dre spont a zo bet difinet,
Neuze er mez euz e vele e neo bet dilampet,
Vel ma tigoraz an non en euz bet remerqet,
Eur spectacl horeruz pitoyabl da velet.

Ractal ar sañris zo et da crial ar person,
Vit anonci dezàn ar spont ag an eston,
Ar person vel clevas racial a zo savet,
Vit gouzout ar virionez a donet de velet.

Ar perron a lavaraz da zaou chassoun,
Donet dhe assista neuze beteg an tour,
Ar person evl men gvelas neuz dezàn lavaret,
Me as conjur aberz doue lavan din piou oude.

An den malhevrus mán lec'h respont ar person,
Ne ra nemet yezou criadennou divergont,
Ar person e coler neuz lavaret dar chassoun,
E zisgen margalfe demeure a veg an tour.

Ar chassoun timat varnan e neuz jennet,
A gant euz torn seulamant e neuz e ziscaret,
Ag ar person o crial pen o veuz e velet,
Perag eta malhevrus ne c'houz get respontet.

Mes allas an den mán ne allas respont netra,
Forcet eo bet da varvel qazi nespot dezàn,
Ray doue a yqa squiz bras a velet e grimou,
Me gret neo pardon ebet digant or guir autrou.

Heman zo eun exempl ag a zo epouvant,
A gle dont da droubla an oll antieramant,
Da deoñ da gompren peguer bras ar c'hrimou,
Peuz cometet an daou mán enep or guir autrou.

Eguile gant e grœc'hen gaor zo bet en em gavet,
En quichen eur punç ag a voa don meurbet,
Daou vuguelic a gavas var an hent e c'hoari,
Ag hen o slapas o daou en ennân da veuri.

Ag en o tristrei ac'hane var ar blacen bublig,
En euz remerqet eno eur groaz qer a manifig,
Pehini voa savet eno en fin eun jubile,
An den mân yoas outi da verza e ene.

Comancet eo bet da grial vel un den desesperet,
Un nombr bras demeure an dud neuze ag diredet,
O velet ar stad effroyabl euz an den milignet,
Allas ag ene lioret siapas dan droug speret.

An dud epouyantet o velet anezân,
Neuze zouden deuz goulennet digantân,
Piou oa euz a be gantre pe ano red anezân,
Ma voa euz ar vraz re piou a red anezân.

An den malheourûz mân neuze a respontas,
Dar justic eno pa rastab e interrojas,
Me eo ar mathevrussa a voe biscoas var ar bed,
Rag va oll dorfejou zo o vont da veza disoteriet.

Neuze e labaras eno ar virionez,
Dan oll assistantet a voa ouz e glevet,
Q tizderint e vuez ensam a derolet,
A buez e gamarad vaa var ar plac lazeta.

Neuze e roas urz ar justic ractal eno,
Da zont de c'haroti de laqat er prison,
Aben zeitet deiz gounde voa e broces juget,
Da veza var ar plac eno en beo losquet.

Crivore ar galon en bolbrîac nep a vije,
O clevet an den-mân oc'h antao ar virione,
Ma ne alze e galon donet da denerat,
Ec'h alje zur lavaret ne voa get cristen mäd.

REFLEXIONS

En trezoc'h tud yaouanc, pere zo ous va clevet,
Comprenit ar maro zo dint-me preparet,
Evit va oll buet fall dirolet a mechant,
Evit deuet var ar plac amân publicamant.

Me a voa eun dep certent a voa eleve mat,
Disget e pep facon gant va mam a va zad,
Ne voamp nemet daou vuguel men voa ar c'hossar,
A me a ra de sivoas divar o zreiz dizeha.

Oren va uneg vloas e voan bet recevet,
Gant person va färoz gant enor a respect,
Da ober va c'homunion emesq ar vugale,
Seiz vloaz e meuz benet e carante d'que.

Da ben va zrivac'h vloas e voan bet debochet,
Gant eur pet yaouanc ag e gamaradet,
Ma yen me bemnos ganta dar c'hartou dan dangou,
Va mallos a bedän gant an nep o c'heuilla.

O'houi tadou a manmou mestrou a mestrezet,
Instruit opugale ag o toimestiqet,
No lezit get da vonet da nep seurt assemble,
Na uero tud honet e compagnunez gante.

Me zo iris siouas melezour digor franc,
Divoalit diouz ar bet entrezoc'h tud yaouanc,
Pedit doue d'ho sicour ag e vam sacr ar verc'hez,
Da bellat diouzoc'h ar goal gompagnunez.

Quitat ran ar bed-man leun a dristidiguez,
Va Jesus adorabl o ped ouzin truez,
Mervel a rin vap ar plaç va c'horf paour vo devet,
Al lude anezan gant an avel stringet.

Cōmprenit va buez entrezoc'h bugale,
Oboïssit d'ho tud' balamour da zoue,
Ag e vezot zur eun deiz all da veza curunet,
Gant Jesus en e c'hloar en pales an ibinded.

Mar oc'h eur c'hoant da c'houzout da glevet e ano,
Baleour var ar mez qercoulz ag er c'heriau.
Taoe et Merer e zeo partout elec'h ma renk sina,
Ag a deu do saludi en eur dont da finissa.



(PROPRIÉTÉ).

Me so rito siouas melozour nigor froue
 Bionnet dionas ar det enveroch ind yadour
 Fout dionas d'ho siouas d'ho roun ar caroch
 Le bellat dionoch ar yod gonyadour

toulit roun ar det enveroch ind yadour
 Le bellat dionoch ar yod gonyadour
 Fout dionas d'ho siouas d'ho roun ar caroch
 Bionnet dionas ar det enveroch ind yadour



toulit roun ar det enveroch ind yadour
 Le bellat dionoch ar yod gonyadour
 Fout dionas d'ho siouas d'ho roun ar caroch
 Bionnet dionas ar det enveroch ind yadour

(Prononciation)